

KANAOUEN NEVE

GROET GANT IAN AR MINOUZ

Diwar-ben ar Ridelaër hag ar Piker-men.

War eunn ton joaüs.

Ar ridelaër a lavare

Ouz ar piker-men p'a gomze,

Didrouzik enn korn he speret,

He-man a renka da dappet ;

Ia, kent 'vit ma vo noz fete,

E vo ret mad d'in ober-ze.

Gwelet a ran zo e-war-n-han

Peadra 'vit ma disraian.

Ha pa goustfe ker ar skoden,

Na renkin paean nep loden ;

Gant ma c'houvezin diout-han

Em bo da zibrin ha d'evan.

E c'han; eta, dre finese,

Da stumman dezhan eur plede ;

Pe me raï mil, pe me raï chat, —

ENN leac'h da ze p'e c'hon 'n em gad,

E renkan breman exersin

Ann art am euz, ret eo ze d'in.

E c'han, eta, dre diskouriou,

Da bentan dezhan flabennou,

Nompas am be c'hoant d'hen laërez,

Dabord, 'vit ze na rin jamez,

Mez, diouz-in kent ma tec'ho,

He arc'hant oll a zispigno.

Ar ridelaër a grog breman da gomz brao ouz

— Te, piker-men, gant da vorzol,
Enn peb amzer, en em gonzol ;
Beza e teuz gounidegez,
Hag, a c'hent-all, talvoudegez ;
Nann, te n'oud ket evel-d-hon-me,
Pouillet, bemde, gant ar groage,

Te, piker-men, pa labourez,
Eur seurt pe sort a c'honeez ;
Ha me kaer am euz-me bale
Gant ridelo koz a neve,
Netra diout-he na douchan ;
Defot n'e c'hallan hô gwerzan.

Koulzkoude, ar c'houlz da brejan
Da beb-den a zo a zonjan.
Kent 'vit mervel, gant ar famin,
Eur ridel pe eunn intamin
Evit hanter-briz e rofen,
Rag erru hon skuiz ouz ho dougen. »

Ar piker-men ouz en klevet,
'N'em gavas eunn tam kontristed,
Hag a respount kerkent dezhan :
— Na oa nep moienn da vevan
'Vit piou-bennag a raje
He varc'hadourez er stum-ze. »

— Petra sot dit, 'me 'r ridelaër
N'hon euz ket holl gonijou kaer ;
Goulen aman ouz ann hostis,
Pe-lech e man he venefis,
Ha kerkent did a respounto :
« E man gant potret an droajo. »

Te, da vihana, piker-men
Euz da zunvez, krenn, pa ve fin,
E c'hall goulen da baeamant
Ebars enn aour pe enn arc'hant,
Zur out bepret p'e labouri,

— Ia, 'me ar piker, ze zogwir,
Ar silanz breman me a vir,
Ar wirione a zo gan-ec'h,
Ret eo din-me konzantin d'ec'h,
Euz ma faëmant e c'hon zur,
A ze ra d'in-me plijadur.

— Karzomp bepred hon chopino,
Peb a vanac'h c'hoas hon devo,
Ha p'e n'out kement faminet,
Eunn tam boet e vo preparet ;
Oblijet omp, a beurz Doue,
Ann eil da zikour egile.

Na ra ket a gomplimancho
Da gregin 'ta war ar meujo ;
Rag p'e rez kement a prejan,
Da gof a vank did da gargan ;
Ar skoden holl me a baeo,
Netra war da gont na vez.

Ar ridelaër, p'en deuz prejet,
Ar ganaouen hen deuz kanet,
Ha ma lavar, ker brao, dreizi :
« Gan-in ma nerz e zo arri.
» Enn etat 'ta ec'h hon breman
» Gan-id-te, piker, da varchan. »

— Chetu me 'ta resusitet
Unan dimeuz ar Roc'hardet,
E lavar kerkent ar piker ;
Breman ive me a esper
E vezò d'in-me kondukter
Beteg ar ger a Landreger. »

Ar ridelaër a c'houlen pront :

— Da Landreger oc'h euz da vont ?
P'en-d'eo gwir ez hon euz ar Roc'h,
Me akompagno ac'hanoc'h,
A dalc'ho dac'h konsortiach
Hep rentan d'ac'h-u nep outrach.

— C'hoas kent evit ma partiin,
Retorn d'am santier a renkin,
Evit kerc'het ma morzolo ;
Gwal dazon ez eo ho bego ;
Ret ez eo d'in-me ho began ;
Nombruz eo ar veïn a bikan.

— Kers buan 'ta d'ober da dro
Hag ember ni en em gavo
Er penn pellan demeuz ar ru,
Ha goude ebarz er *Penn-Du* (1)
A refomp hon daou hon ziskenn
War ar gwin ruz hag ar gwin gwen. »

Ar piker buan a barti
En trezeg santier he ami
E zo ebarz enn Louannek ;
N'hen d'eo pelloc'h ken ezomek ;
Neve douchet hen deuz he baë ;
Breman ez eo joaüs ha gaë.

Ober a ra he oll efort
Da 'nem rentan gant he gonsort.
Kerkent a ma c'herru gant-han ,
E propos eur bannac'h d'ez-han.
Ractal, neuze e partijont,
Mez eunn hent fall a gemerjont.

*Aman hen deuz kalz a vank ar piker-men o
lakaat ar ridelaër da ziskin ann hent ber
d'ezhan, rag enn leac'h kaout eunn hent ber,
abarz er fin e kav eunn hent hir. P'en em
wel dic'hencheton, ar piker-men a lavar :*

— Oh ! ridelaër, ma mignon kez,
War ma hent-me n'e d'an ket rez,
Ha koulzkoude e c'houantean
Kaout bepret an hent berran ,

(1) Le nom d'une auberge de Tréguier.

Rag gred vraz am euz da welet
Ma donz Franseza, ma fried.

— Oh ! te n'oud ket bet dre aman,
Biskoas, pikér-men, a zonjan ;
Ouz da glevet me am euz fent,
Rag hema eo ar berra hent.
Breman zouden en em gavi
D'amdost da barouz Trézéni. »

Kaer enn deuz ar piker bale,
Kenn ez eo berr var e jave,
Na zosta tam da gâd ar ger :
« Oh ! tromplet oud, ma mignon ker,
Mar 't'euz laket en ez kreden
Eo tud zod ar ridelaërien. »

Ar ridelaër 'ta a glaske
Diskin dez-han hencho neve ;
Rag enn e speret a zonje,
Seûl-vui gantan ma valeje,
Mui-ze ive a brofitje
Euz ann arc'hant a zispignje.

Ar piker 'ta, kollet he benn,
Ne oar peleac'h ken en em denn ;
Mez ar ridelaër en kaso
Da gement hosteleri vo,
Hag eunn nombr bras a baroujo
Kent 'vit ar fin a dremeno.

Kent evit donet d'ho sitan,
Kad eunn almanak a renkan ;
O klask beþred ann dro hiran,
E ra moïen d'en em rentan
Ebarz enn parez Plougouskant.
Me zonj eo pare ann arc'hant.

Enfin n'am eus ket droug zonjet,
Rag ar ialc'h holl e zo karzel ;
Krog a oer da c'houlenn kredit ;
Trec'h eo ar c'holl d'ar gounid ;

Dispignet eo holl ar zunvez ;
Breman e vo tristidigez.

Kerkent 'ta ann daou gamarad
E ra entre 'zho eur c'himiad :
— Ken a vez, 'me ar piker ;
Te, ridelaër, zo eunn trompler ;
Ia, o konfiout re enn out,
E t'euz gret d'in mont enn derout.

— Ma minoun ker, em eskuzet,
N'hon ket esprez enn em dromplet ;
Na gemeret 'ta nep annui ,
Rag me 'm euz koll kerkoulz a c'hui :
Eunn hanter euz ma ridello
A zo eet da baean frejo.

— Oh ! ridelaër, te a zo fin,
Kalz finoc'h 'vit ar piker-men ;
Laret a rez e teuz bet koll,
Goude eo me a bae dre holl
Ar boissoniou hag ar meuzo ; »
Breman he gorf a amanto.

Ar piker er ger p'e n'arri,
Franseza, trist, a zao hi vri :
— Me a zonje, e me'i, ma den,
Na retornjac'h birviken ken.
Oh ! pebez tro ez eo c'homan !
Klevet he zoare a renkan.

— O Franseza, ma vried kez,
Gant a dom eo d'in me a c'houez ;
Kement, kement am euz baleet,
Ken n'en d'hon ket evit laret
Dre belec'h ez hon tremenet ;
Kerc'hit d'in buan eur rochet.

— Kent 'vit ma spezo rochedo,
Me renk sellet da c'hodello ;
Ret e vezd d'in-me gwelet
Hag hen eo ann traou dispignet.

Da zispign te a zo tec'het ;
la da roulan e was mənet !
Kaer am euz aman tastonat,
Na gavan nemet kalounat ;
Penos a paein-me ma dle ?
Koad ar vaz az pezo fete,
Me 'm euz aoun-bras, war da chouk ;
N'eo ket hep zujet ez hon drouk.»

— Allas ret eo din konsantin
E zo arriet gwal heur gan-in :
O chomm en eur park da gousket,
Ma godello a zo videt ;
A ze zo kaus na greden ket
Donet ker buan d'ho kwelet.

— Ia, ia, ia, koz, koz meoier,
Ma rafen breman ma never,
E kemersen ma baz-ribot ;
Ret e vo lampad d'ann assaut,
Hag ann ini a chonezo,
Diwar vreman mestr a vez.»

Ar gann e zo meurbet sanglant
Hag ar gombat gwal violent ;
Ar plac'h ar goaz he deuz trec'het ;
Abaoe mestrez ez eo chommet,
Hag ar piker-men a brommet
Na doro mui he zec'het.

Ho-man a zo eur ganaouen
Gret 'vit rei d'ann holl da gompreñ
Penoz ho d'euz da zisfiout
A gement ridelaër a zo tout ;
Rag ann den ze a ra klacho
Da galz a baotret fin a zo.

Ar c'hompoziter diouthi
Hen deuz nebeudik a studi
Evit galloud examinan
Ar farso brao a raï breman

A ridelaër dezhanive,
Diwar-benn he chanson neve.

Kazi, zo-ken, na gredan ket
Laret d'ac'h piou ez hon hanvet,
Gant doan rag ar ridelaërien,
Ha gant doan deuz ar bikerien ;
Rag ma klevfent e venn Minouz,
E teufent buan d'am gourdrouz.

KEN.

Propriété de l'éditeur.

Savet gant Ian Ar Minouz, gwersaer, demeuz a Sant-Adrien, en Pleuveur-Gautier.

